

Miz an Azvent 1843

Skornet e oa ar maezoù edan terennoù ar loar. He gouloù a sklêrijenne barroù ar gwez kludet àr ar c'hleuzioù a bep tu d'an hent. Ne voe ken 'met kerzhed ur jav da dorriñ an didrouz dre skoiñ àr an douar kalet. Ar marc'heger àrnezhon a oa ledan e dok hag izel e benn a-gaoz d'anoued ar gouiañv ; blev dispak hir a oa dezhoñ, laosk àr e zivskoaz. Ur vantell lêr hir a oa edantoñ ha botinoù uhel, re ur marc'heger anzav.

Digas e chome an evned-noz doc'h an den, netra 'met ur skeud anezhoñ. Ur spontailh oc'hpenn e-mesk ar re arall. Monet a raas get e hent betek ur penn-ti diamen. Moged a save a-ziàr beg ar siminal ha skleurenn ur c'houlouenn a gorolle dre wer ar fenestrig. Diskenn a raas a-ziàr kein e loen ha divandiñ doc'hton kent tapout krog en ur pistoled. An arm a oa kizellet e fust get del derv, ha hè¹ goloet get skler an noz. E gammedoù pounner a raas d'an erc'h strakal. Dousik-ha-dousik eh ae, ha heñv ha chom a-sav un herradig. Teurel a rae burezh da bep

1 Hè : int.

dic'hwezhadenn get ar yen ma oa, a-lusk get tosoù e galon. Lakaat a raas e zorn bavet doc'h prenn an nor. Garv e oa ar rev, a deuzas tammigoù edan e vizied. An dorn arall a zalc'he start an arm kouchet àr an nor. Gouiet a rae a-walc'h ar pezh a oa doc'h er gortoz en tal-kein anezhi.

He digoriñ a raas frank ha monet-tre hep un hak², savet e bistoled getoñ. Ur gwaz a oa doc'h taol, hag a savas e benn, beg ha razh. Ur cher³ skuizh ha tenn a oa d'ar paourkaezh : treut e zivougenn, ruz e zaoulagad, lous e zilhad. Pilhotoù anezhe, gozik lâret. Chom a razont divouezh o-daou. Netra nemet an avel-noz é c'hwezhiñ dre doull an nor e-pad ma parazont o selloù an eil àr egile.

Ar marc'heger a gredas fichal kentañ : serriñ a raas an nor get beg e droad hep distagiñ e sell a-zoc'h e ostiz drec'het⁴. Hennezh diwezhañ a oa ur skudellad diraktoñ, tommet dezhoñ e tan an oaled moarhat. Treut ar soubenn ha treut glustraj an ti ivez. Annez un den diàr-dec'h an hani e oa, hep mar erbet. Kreniñ a raas e valog pa azezas ar c'havalier a-dal dezhoñ, beg an arm durc'haet doc'htoñ c'hoazh. Hani ne rannas grik. Didrouz-kaer ar lec'h, panevet tarzh an tan kroget er skod ha doc'h er c'hrigniñ.

— Aran... Na gwir a lârent, eme ar gwaz kozh en diwezh.

Aon a oa en e vouezh mes derc'hel a raas alkent :

— A-c'houde keit amzer... Setu-c'hwi daet da ma c'havout. Ar bleiz a raent ac'hanoc'h, moarhat e oa ar gwir gete.

2 Hak, hep un hak : hep termal.

3 Cher : neuz.

4 Drec'het : spontet.

Diskouezñ a raas bout etre div galon ha teurel ur sell doc'h an arm. Ar marc'heger a chomas àr-dav.

— Ne rin ket botoù-kazel : laoskit-heñv àr an daol mar karit. En etretant gober 'pezh a zleoc'h gober.

Egile a vanas mut mes tenniñ a raas e dok àr e oarigoù, sanket e sell e kani an den kozh. Izelaat a raas e bistoled hep diskrogiñ e vizied gwenn azoc'htoñ. Kasoni a save anezhoñ. Unan bounner ha berv er lakae da stardiñ e chagelloù ha derc'hel digor-frank e zaoulagad. Hiramzer e chomas an daou zen e mod-se, doc'h en em sellet. Hañval doc'h div zelwenn verglet e porzh ur c'hastell fondet.

Goude un herradig e vihanaas an tan. An hani kozh a gredas sevel, monet betek an oaled ha magiñ ar flammoù diàr beg ur fichell. Klevout a raas dir ar pistoled e penn arall ar pezh ha heñv da dapout lorc'h en-dro.

— Ma merc'h zo é chom e Motenn-Arar, eme-heñv get mall. Àr ar porzh-mor, a gredan. En un tammig loj diskempenn. Ba' gouhinell an oglenn gozh emañ he zi.

Sevel a raas e viz trema un arc'hig, krommet e chouk get pouez ar gozhoni.

— Kemerit ma yalc'had genoc'h mar karit mes laoskit un darn dezhi. N'eo ket-hi kaoz d'ho arfleu. Kontrol din, moarhat.

— Ba men emañ Iwan ? a zistagas an arall hep gober man erbet ag ar yalc'had.

— Ar gourig ? eme-heñv get souezh bras. Eh oc'h é klask mont àrnezhoñ ivez ?

— Ha ne oa ket-heñv genoc'h doc'h taol Tegoneg Tordir ?

Krisiñ a raas e zivabrant, liv ar spont doc'htoñ. Ritenoù e dal a zonaas en un taol.

— Da betra hon distokiñ tro-ha-tro èl ma rit ? Gouiet a ran a-walc’h ho peus lazhet ar re ’rall ivez. Hag àr hor levc’h ? Ne chomay deoc’h ’met semeilhòu da jiboesat, ’m eus aon.

— Àr ho kwall eo Kemo. Ho treisoni hag ho kwall labour eo o deus graet ur spurmant doc’hin.

Hennezh a dapas harp àr an daol en ur ober begoù get ar bras ma oa e from.

— N’er c’havoc’h ket ken, a anzavas neuze. Aet eo d’an trevadennoù doc’h am boa klevet, pemp pe c’hwevc’h vlez a-c’houde, marse muioc’h.

— Get argant an torfed moarhat ?

Ur c’hruz a raas d’e zivskoaz. Anat e oa penaos ne grede ket dislàret ar marc’heger. An argant-mañ a oa daonet ha keuz a oa daet dezhoñ lies bout o serret, mes keuz diwezhat ne dalv’ ket.

— Làrit din razh ’pezh a ouiit a-ziàr Iwan hag e di en trevadennoù. Ha me ’ray àr-dro yalc’had ho merc’h èl ma karoc’h ivez.

Ne chomas ket Kemo etre daou soñj : petra en doa da goll ? Ar paotr-mañ a oa den da virout e c’her ; er c’homprenet en doa àr e goust, siwazh. Dispakiñ a raas e eñvorennoù ha pilat e c’henoù. Gwerso ne oa ket bet meneget ar gourig getoñ, nag an amzer gozh naket. Na bout drol dezhoñ e kavas ur meni disamm-spered e mod-se. D’un termen bennak eh aas ar gaoz àr estroc’h evit kimiad Iwan, betek dousaat an aergelc’h un disterañ. Glac’har a zaas en diwezh, e-lec’h ar spont hag ar c’heuz. Ur gaouad tristez hag a c’hlebas e zaoulagad :

— Doc’h ma vever e varver, n’eo ket ’ta ?

Aran a sellas doc’htoñ, divouezh. Ne oa ket a druez

er paotr roltet en e vantell hir, daoustoc'h ma tiskoueze bout skañvaet e gasoni un tamm. Sevel a raas e bistoled ha tenniñ trumm. Moged a darzhas dre ar penn-ti en e bezh ha korf an hani kozh da gouezhel àr an douar pilet. Ar gwad a ruilhas dre-edan an daol, amzer d'ar muntrer stagiñ e arm doc'h e c'houriz en-dro. Gwir a lâre Kemo : e naon a zial a oa unan ag ar sort na dorrer ket, hañval doc'h kani ar bleiz en araj. Adal neuze, ne chomas ken 'met un anv àr e listennad : kani Iwan, moranvet *ar gourig*.

1816

Maner Rozkelenn a oa en e blom àr lein un dostenn, e parrez Loglaouneq. Gronnet e oa get koadoùier glas, pellik a-zoc'h ar vourc'h. Pradoùier a oa tro-ha-tro dezhoñ ur sort, deñved é peurat enne peotramant roñsed en o c'hloziòù. Ur voem e oa arvestiñ doc'h an nevez-hañv eno : ar plant é sapiñ a bep tu, ar bokidi é kellidiñ edan richan an evned gwiv. Betek red ar riolennoù é kas o buhez d'ar flagenn izelikoc'h ha d'ar stêr vras é tonet a greiz ar vro. An Dronren a veze graet anezhi, un drol a anv ha ne ouie den a ven e tae. Atav, pas a rae e toullenn Rozkelenn ha kas a rae he dour da vilin Kerwazh, pellikoc'h, kent tremen dre-edan pont maen Kêrhaleg, e dan flourennoù Sant-Derc'heg hag e mod-se betek porzh-mor Motenn-Arar, brasañ kêr ar gontelezh, lec'h en em daole er mor bras. N'eo ket gwall lies eh ae ar paotrig di newazh, rak re yaouank e oa c'hoazh da neuze evit beajiñ get e dad, ar beskont.

Hirsoñj en doa Aran ag ar prantadoù eürus-mañ, e kavell e diegezh. Anavout a rae e-leizh a veitourion e dad

a laboure douaroù Loglaouneq : kouerion, artizaned, pe c'hoazh ar miliner a zisplije a-walc'h d'e vreur Sulian, a lâre bout koarenn⁵ un tammig. Ne verne ket bras dezhoñ d'an oad-se, e blijadur a veze monet da redek dre gleuz ha garzh da-heul e vreur hag e c'hoarezed dibilh. Sulian ha Heodez, ar re goshañ, a ranke monet d'ar skol lies-kaer newazh, ha heñv er gêr da abuziñ e amzer. Pa veze e-gunan e chome d'ober karig d'ar c'hezeg é soñjal er gwerzennoù kontet dezhoñ an noziou e-raok get e c'hoar Heodez. Ne oa ket par dezhi da gas marvailhoù an amzer gozh, displeget èl m'he doa o lennet, moarhat, rak lenn ha skriv a rae ag ar gwellañ. Kaoz a veze get he istoerioù a varc'heion àr gein o c'hezeg ; bout a oa troioù-fuzik an diaouled, ha re an c'hoariganed ; bout a oa istoerioù karantez doc'hpenn kaer. Gwezhavez e veze drec'husoc'h ar gwerzennoù pa zae ar gaoz àr ar vorlaeron pe àr pobloù gouez an trevadennoù. Ar re-se a vourre é atahiniñ an dud vat ha doc'h o diwadiñ e-kreiz o menezioù kevrinus.

Àr an deiz e talc'he-heñv da voueta e fantazi. Da varc'hegour eh ae àr Jourdoul⁶, kazeg wenn e dad, peotramant da vrezelour kalonek, sorser dornet-mat, pried ur briñsez bennak... Kavout a rae berped peadra da vagiñ e c'hoarierezh, dreist-holl a pa zae e genderv Iwan d'e heul. Henezh a oa a oad getoñ àr-bouez nebeut ha lies a wezh e tae get e dud hag e vreur Jozon da weladenniñ an tiad. Kenderv-jermen e oa dezhoñ a-berzh mamm. Bep taol ma tae get e re e lonkent boued Rozkelenn èl chas àr un tamm kig, pezh a voeme Aran. Heodez en doa displeget

5 Koarenn : pilpous.

6 Jourdoul : birvilh.

dezhon e oa paouroc'h o zud ha n'o doa ket kement a vevañ en o zi el bugale ar beskont. Setu, ar c'hrouadurig en em gave chañsus e-keñver ar re arall a wele é tonet d'e vray a vaner. N'eo ket kement-mañ a lakae disparti etre ar lapoused newazh, ha c'hoari a raent forzh pegement betek ar c'huzh-heol. Plijadur en deze Aran é redek e-gunan ivez, el-rezon, pa veze nebeutoc'h a gouvidi er gêr. D'enderv-nouz e kleve Bejeb Gozh é trouzal e toull he dor. E mod-se e ouie e oa mall dezhoñ galipat d'e vaner en-dro, da zebriñ un tamm bara-amanenn. D'ar liesañ e veze gourdrouzet get ar vatezh kozh : « 'Men 'oac'h c'hoazh ? » a c'houlenne get he mouezh raouliet. Berped e tae ar memes respont d'ar paotrig ha ne rae ket-hi 'met ur sell rous doc'hton.

Da c'houiañv e veze filajoù er maner, da noz. Degemeret e veze kamaraded e dad, tudjentil elton, a chome da lâret kaer doc'h taol betek an tronoz a-wezhadoù. N'en doa ket ar gwir da chom gete ken diwezhat-se mes kavout a rae an tu da siliñ e benn dre doullou an dergei⁷ hag o spial el-se. Kanennoù, sorc'hennou, gwerzioù a zassone er sal vras. Na bravat un arvest d'e zivskouarn tener ! Er penn arall e wele ar maouezi é katerat. Soñj en doa dalc'het a unan dreist-holl : un damezell joubius a ouie lan a sonennoù. O lâret a rae ar-bouez he mouezh flour, he divougenn ruz é lufriñ edan he c'hoef gwenn. Hi a oahi ur geniterv bennak d'e dad rak gwelet e veze bep blez e-kerzh ar filajoù, mes lonket en doa he anv a-c'houdevezh. Re yaouank e oa ar paotrig evit he hantiñ⁸, anat, mes ne

7 Dergei : diri.

8 Hantiñ : daremprediñ.

oa ket evit distagiñ e sell a-zoc'h he dremm goant. Lieskaer e vane kousket en dergei, aet e soñjoù get buhez an dud daet. Pa gave ar galon da vonet da gousket e chome c'hoazh pellamzer da lakaat ar c'hanennoù da droiñ en e benn. Èl-mañ e oa hañval dezhoñ bout kaset da Gêrhun get luskennerzh ar maouezi ha c'hoarzherezha ar wazed.

D'an hañv e veze pardonioù ha ne oa ket ar memes kont neuze. Goulennet e veze getoñ monet da glevout an oferenn get e c'hoarezed : Heodez, Elibouban ha Margarid. E-leizh yaouankoc'h e oa Elibouban ha Margarid hag an dra-se zo kaoz e kave gwell chom get Heodez kentoc'h, peotramant get e vreur nemetoñ, berped gailhart ha drant ma veze anezhoñ. Goude an dro en iliz en doa ar gwir da chom da redek a-bad an deiz. Monet a rae a galon vat dre ar maezoù get ar chataled arall, re a oad getoñ. Bugale peizanted ha tudjentil en em gave disoursi da c'hoari asambl. Ha bec'h d'ar c'hanetoù ! Etre daou c'hoari eh aent d'ober un tamm tro dre stalioù ar Jipsianed. Dourenniñ a rae o dent é welet ar madigoù displeget dezhe. Iwan a oa ambac'hoc'h evit Aran ha hennezh-diwezhañ an hani a yae d'o freniñ, ur blank bennak ar sac'hadig, e-raok o ranniñ kenetreze.

E-leizh a dud a zae d'ar predesion d'enderv, muioc'h c'hoazh evit na veze da vintin. Ar feutanioù a daole o dour-mammenn d'ar veleion ha d'ar bannieloù. Strimpet e veze tapennoù dour benniget d'an engroez kent dezhe aogiñ en douar glas. Hervez ar pardonioù e veze un astenn d'ar lid d'enderv-noz : rederezh kezeg e pardon Sant-Enogad da skouer, ar pezh o boeme plaen. E pardon Sant-Gobian e veze tantadoù bras hag e kani Sant-Gozhard e vezent c'hoazh get model gozh ar gourenoù.

Kement-se a oa hervez galloudoù ha buhez ar sent enoret da neuze. En e barrez, Loglaouneq, ne veze ket kement-se a ardoù mes koutant e veze bep taol dre ma hiraë ar soubenn é sailhal en Dronren get e gamaraded. Ya, eürus en em gave e-pad amzer e yaouankiz e maner Rozkelenn, mes ne vehe ket evit padout da viken.